

r

Chanson nevez vit diskleria "tourment vras omp bro"
Ton: "Itron Varia Bulat roet d'in sklerijenn".

I

Habitantet a Breiz-Izel, tostait oll da glevet
Da glevet a tourmen vras, so nevez dremenet
Da glevet eur malheur bras, arruet gan omp bro
Da pezh hini so graet siwas eu toll gouel divalo.

2

Eur vro euz a herran, renet gan a Republiq
"ec'h a non rejouissait, ken-couls paour a penvik
A boe eu neubet blavegeo zo, gan o oll bolonté
A veve brao en tud kez, barz in gougeañ Doue.

3

Va spered a zo dister, evit gallout diskleria
Ar c'holl bras zo graet d'omp bro, pa oamp oll in brassa joa
Ar peoc'h ar liberte, ao breman barz in Franç
A pa sonjomp an nebeuta zo tennet warnomp vengeañ

4

Er bloavez naou a tregon, in fin miz gwengolo
Woa galvet en holl tud armé, da vont da diven o bro
Kenavo da tad a mammm, breudeur ha c'hoarezed
Ni za vont d'arrêr da diven Franç, omp bro muan karêr.

5

"enka euz kuitad o zud, partia euz ar guer
Evit mont d'a combati, euz soudardet Hitler
En den man dre oll vengeañ, a dre oll combine
A eis lakeat e ne ben gouarn en oll bro.

6

Lakat eus en tan goal, pevar horn euz ar bed
En dra se betek breman, na oa biskoaz gwelet
Squillet n'euz eur goad euzus, gant y oll armeo
Vel eu diaoul divadé euz fons en nivernb.

7

Partout lec'h euz tremenet, barz in touez en tud kez
N'euz lakat poaniou bras a kals a tristidiguez
Dichadenet euz war ar bed, en oll poaniou cruel
A lakat war en douar, brezel universel.

8

Deut so gantan eu arme, dimeuz a re vrasa
Evit envahissa omp bro, a don ive d'y drasta
En dek eus a miz mai, er bloavez daouguen
Euz lancet eu attack vras, tresek ar Francigen.

9

En tud de eur sonj ker no kalon, chom iveda resista
Euz rekate ober demi-tour, pe chom tout da laka
Didan ar houarn a dir, a gouezet warne euz crec'h
"ancet gan en aviono, evit gouassat ar bec'h.

10

En Allemanted dirollet, kalz wassoc'h vit tud zod
Tana, drailla, a lakat dema teuson a rog
Distrujet a euz kalz, dimeus ar herrio ker
"ec'h a chom siwas netra, met ruin bras amiser

II

Skei a réen didrue, gant o avione eusuz
 A ober war o vassaj, kals a valerio spontus
 Kals siwas eur a bob, a euz renkat kuitad
 Ho loened, ho douar, ive tout ho oll vad.

I2

Evit klask en tam ppui, ateuson tout a vagad
 Da haloupet a nenchou, an derre no daoulagad
 Evel kals eus ar mammou, bugale touez a diou vrec'h
 A houlon sikour ouz Doue, non zellet tresek crec'h.

I3

Trist meurbet va gouelet, tud a bep sort nouageo
 A haloupet eus a partout, atec'hel raok ar maro
 Kar a remé tud ken fall, a tud ken didrue
 A tennet kouls war tud koz, merc'hed a bugale.

I4

Red e oa gouelet ive, an tud vad soudardet
 Hep na fusul, na canon, rei pen da ennemiet
 Gouragus e van meurbed, me deva ket armo
 Da hallout combatti, evit difen ho bro.

I5

A villiero gant ar bochet, a in bet dastumet
 Da pere in bet gouerset, kals gwasoc'h vit loened
 Kaset in pell euz ho bro, a pell dimeuz ar gêr
 In tre doarn tud disurc'h, dagavet naon a miser.

I6

Trist meurbet vije o c'halon, a sonjal bep momet
 Et no groek, ho zad, ho mamm, ho amzer dremenet
 Et lec'h a non labourat, gant o holl bolonte
 A deva peoc'h ha plijadur, a o holl liberte.

I7

Kaloned bras a d'euz ive, c'hoaz ouspen a souffranz
 A sonjal bep eur ha bep momet, in eur ho delivranz
 Gwasoc'h vit galourien, lac'het gantê tad ha mamm
 In laket barz ar prison, gant ho gouarnamant

I8

Biskoaz barz an histor, oa gouelet kement all
 Lakat koll soudarded Franz, gouerzet gant an tud fall
 Kar ar Francijen trahisset gant ho mestou hudur
 Zo laket gwasoc'h vit biskoaz barz an displiadur.

I9

Envahisset e o douar, gant an tud insolent
 A laket koz ha yoank, barz o brasa tourment,
 Met birviken tud vad ar Franz, n'euz gallout toleri
 Gouelet o brasa adversour, e ton d'ho homandi.

20

Kar ar Francijen rened mad, zo gouel vrezelerien
 Kat da difen ho douar, partout war an dachen
 Prest bras a in darre, dagemer a armo
 Evit mont ken courajus a biskoaz, tresek ar c'hombajo.

21

Kar biskoaz arme Franz, brezel n'euz kollet
 a vije gant mestou franç, a leal gouarnet,
 Met bean oa siwoaz in omp bro, kalz a treitourien
 A oa o vrasa plijadur, trahissa benç a ben.

C'hoant a deva da ober arrê,vel an amzer gwechal
Lakat ho zroad war gouk a paour kez,ampec'h nean da harzal
Bean oa ive barz in Franç,kalz euz ar pennou braz
Deva hoant da lakat ho bro,arre in esclavaj

23

Evit mont da komandi,a da ober d'im lezen
A ober d'im daouliad,dirak eur drapeau gwen
Met ar Francijen unanet,n'a euz ket goulenet
Evit ma vije c'hoaz ho bro,gant en no gouarnet.

24

Ar re ze euz laket brezel,pa na oan evit gouarn
Ha chadeni ar paour kez,da viken tre o daouarn
Ober dean gwasoc'h evit eur loen,labourat noz a de
Miser a poaniou bras,ben a ben e tam buhe

25

Breman a teusan d'ho pedi,da ober intention
Dimeuz ar noblans,zo treitour a galon
Lakat a euz in Franz,siwas kalz a galc'har
Sort biskoas touez ar gristerien,oa gouelet war an douar

26

Digaset a d'euz in omp bro,ar bochet digalon
Evit ~~ikamp~~ dont d'omp maltreti,hep n'a sijet n'a raison
Lakat euz ar Francijen,da skuill kalz a derro
A kalz anet da souffr poaniou bras,betek heur ar maro.

27

Ar maro a zo cruel,ken kri ha ken kalet
"et tristoc'h c'hoaz eo ive,en den marterizet
Pez a zo graet da kalz siwas,gant ar bochet infernal,
Skoet ken didrue,a siwas kalz treeo all

28

Dijunted euz ar partout,tennet de ho daoulagad
"euz a houerset an tud hudur pa velon redek ar goad
Graet a zo d'im didrue,gant servigerien Hitler
Souffr an oll poaniou cruel,a dougen eur groaz pouner

29

Met dont a ra c'hoaz en devez,fin a vo d'omp glac'har
Pa vo sinet an nevez,a peoc'h war an douar
Ar joi vras vo e omp c'halon,pa glevomp ar c'helo
A pe glevomp tintal gloir,an holl kleier omp bro.

30

Delivret a omp arre,euz ar brasa poaniou
Roet d'imp omp liberte,torret omp c'hadenou
Breman n'imp a vevo arre,gant eur c'halon content
Pa eo chasseet euz omp bro,ar bochet insolent

31

Goude bean gante occupet pevar korn ar bed
A euz rekat return da ger,vel eur vanden chass fouetet
Goul omp breman gras Doue,vit ma vel omp birviken
En tud treitour euz en Allemagne,e ton da ober d'im lezen

32

Setu aze ma zud vad,tout a m'euz dac'h diskleriet
A piou penak a gav,faut euz ma ombjot,me obet d'im laret
Me parlanto gant en den se,ya in bep fesson
Koulz in galek vel brezoneck,partout gan ar raison.

Y.CESSON

Toutes les reproductions sont interdites.

Prix:10 francs

Imp.Anger,rue St Nicolas.Guingamp.